

(f° 7^o)

Jannedig Arzur.

merc'het yaouank trizini mo suppli ag o ped
pa peo amouïjen (1) na vid ked re orget

Aumont Jannedig arzur a lerer a zo bed
Aumont Jannedig arzur deus a wernalegen

neus choazet eur chervijer deus tal bourg ar quer wen

= Peded deus a nean da vonet de goulen
Digas gantan dud chentil petramant beleïen

An otro Koadalio (2) a person trizini
a re ze a ia gantan a zo daou pot hardi

An otro Koadalio enes a parlante
en ti bras guernalegan er (3) gadeur en e goarze

Kent er vit dibi ag evan Komenç ober cher vad
Goulenomp ar veric'h Janned deus e vram ag e zad

A zad Guillarm an arzur a respontas de ze
Ma merc'h a zo re yaouank da dimui otrone

ma merch a zo re yaouank otrone da dimui
Da entren en tieghez a da Komer sourci

teot Guillarm an arzur teot na volet Ked
Rag en disir e c'halon e ia o merc'h Janned

O merc'h Janned a allo bragal ag ebatan
en ti Pierrez Nicol zo moyez ~~de~~ bewan.

(1).- Ms.: amouïjen; lire: amouroujen? (2).- Ms.: Koadalio; lire: Coadalio.

(3).- D'abord: en; l'n de er écrit en surcharge sur l'n de en.

